



Atalieroù ha gweladennoù pedagogel

Skolioù ha lezskol

- Kentañ derez-Eil derez

Miz Meurzh 2018-Miz Du 2019



© B.Deroche

Nevezentioù :

- Diskouezadeg verrbad : « Breizh da vare ar rouaned, eus Morvan da Alan Veur, 818-907 »
- Atalieroù adnevezet



ancienne
abbaye
Landévennec

Mirdi an Abati Kozh
29560 LANDEVENNEG
www.musee-abbaye-landevennec.fr
T • 02 98 27 39 46
C • g.fauve@museelandevennec.fr


Taolenn

Diskouezadeg verrbad 2018	1
Atalieroù 2018.....	2
An henoniour bihan (doare nevez).....	3
Kaerskriverezh er skol Karl Veur.....	4
Gweadegoù (entrelacs).....	5
An enklasker bihan (doare nevez).....	6
Ar saver abati (doare nevez).....	7
Liorzh al louzeier	8
Kêr Is.....	9
Gweladennoù heñchet	10
Titouroù pleustrek.....	11

Diskouezadeg verrbad

2 a viz Mae 2018-Miz Du 2019

Breizh da vare ar rouaned, eus Morvan da Alan Veur, 818-907



Evit meur a Vretoned, ez eo Nominoe, Salaun hag Alan Veur tudennoù rouantelezhioù mojennel, diaes da stagañ ouzh ur mare resis en Istor.

Petra ouezomp eta diwar-benn rouantelezh Breizh? Peseurt darempredoù he doa gant impalaerezh diskennidi Karl Veur? Penaos oa ar bed gant Breizhiz ar mare-se, pa vefent nobled, menec'h pe peizanted?

Sed aze danvez an diskouezadeg kinniget gant Mirdi an abati kozh evit lidañ 12vet kantvloaziad an emgav a oa bet e 818 etre Loeiz an Devot ha Matmonoc, abad Landevenneg.

Diwar an dizoloadennoù arkeologel anavezet abaoe 30 vloaz, e vo lakaet war wel ur mare leun a virvilh a-fed sevenadur ha fonnus-kenañ a-fed eskemmoù gant an diavaez... Un istor pell diouzh skeudenn ur vro serret warni he unan.

Ur weladenn frank pe heñchet ?

Deoc'h da zibab, an diskouezadeg a c'hell bezañ dizoloet hoc'h unan pe gant buhezourien an Abati kozh (gwelet ar prizioù p. 11).

Ar glad istorel, skor pedagogel d'an deskoni:

Abati Kozh Landevenneg a zo ul lec'h arouzel evit kompren istor ar Gristeniezh e Breizh hag ur savadur manac'h karolingat dibar en Europa. An atalieroù hag ar gweladennoù a c'hell bezañ implijet evit labourat war demoù ar programm- skol:

- Kelc'hiad 3 (CM1): "Hag ar-raok ar Frañs?"
 - Kelc'hiad 4 (5vet): "Kevredigezh, Iliz ha galloud politikel er Grennamzer (XIvet-XVvet kantved)"
"Kristeniezh hag Islam, VIvet-XIIIvet kantved, daou ved e darempred an eil gant egile"

Atalieroù 2018

1. AN HENONIOUR BIHAN: C'HOARI FURCHAL

Skolioù kentañ ha skolajoù.

E-pad 25 bloaz eo bet furchet abati kozh Landevenneg. An dizoloadennoù o deus lakaet war wel istor ar vro.

Pal: Deskiñ teknikoù furchadeg gant solioù adsavet.



2

2. ARZ AN EILER : KAERSKRIVEREZH GANT UR BLUENN WAZ

Skolioù kentañ ha skolajoù.

An abatioù a zo e-kreiz adc'hanedigezh sevenadurel an 8vet-9vet kantved. D'ar mare-se e veze skrivet kalz a dornskridoù e Landevenneg.

Pal: Deskiñ istor al levr da vare ar Grennamzer ha skrivañ e-giz menec'h an 9vet kantved.

3. GWEADEGOU (ENTRELACS)

Skolioù kentañ ha skolajoù.

Kinklet brav tre gant tresoù difetis e oa dornskridoù deroù ar Grennamzer.

Pal : Deskiñ tresoù ha teknikoù implijet gant arzourien ar mare-se.

4. AN ENKLASKER BIHAN

Skolioù kentañ ha skolajoù.

Ur bez zo bet preizhet, piv zo kablus ?

Pal : Dirouestlañ luziadelloù ha dizoleiñ buhez ar manatioù er Grennamzer.



5. AR SAVER ABATI

Skolioù kentañ ha skolajoù.

Azalek 818 e vev ar venec'h e mod St Beneat. Ar reolenn relijiel-se a vez gwelet dre savouriezh ar manati.

Pal : Dizoleiñ en un doare dudies penaos e oa savet an abatioù e-pad ar Grennamzer (c'hoarioù war ar muzuliañ, ar mein, an ostilhoù...).



6. LIORZH AL LOUZEIER: PLANTENNOU LIORZH KARL VEUR

Skolioù mamm (nemet ar re vihan) ha skolioù kentañ. miz Even- miz Du.

Pal : C'hoari tro-dro da blantenoù liorz ar venec'h ha dizoleiñ penaos e vezent implijet da vare Karl Veur

7. KER IS

Skolioù kentañ ha skolajoù.

Ar glad hag ar mojennoù! Ha gouzout a rit ez eus bez ur roue e Landevenneg? Hag hini Gralon e vefe ?

Pal: Ar gontadenn, he orin ha skrivañ gant ur bluenn waz.

An henoniour bihan

A-hed ar bloaz
Niver a skolidi uhelañ: 28
Er maez, er goudor



© B.Deroche



© B.Deroche



© B.Deroche

Palioù pedagogel:

- Dizoleiñ ar vicher a henoniour
- Deskiñ hentennoù furchadeg ha dielfennañ an dizoloadennoù, lakaat e pleustr war ur minichanter furchal

Padelezh : 1^e30

AOZADUR

1) Displegadenn er mirdi

Gant ur benveg pedagogel, savet gant henoniourien a-vicher, merzhout troc'hadoù stratigrafek a lak da gompren mareoù sevel ar manati.

2) Ar minichanter furchal

Gant ul loa hag ur skubellig e labour ar vugale war ur chanter adsavet. E-giz un henoniour a-vicher e tielfennont o dizoloadennoù evit kompren istor al lec'h.

Kaerskriverezh, er skol Karl Veur

A-hed ar bloaz
Niver a skolidi uhelañ: 30



© B.Deroche

© B.Deroche

4

Paliouù pedagogel :

- Kompren pouez ar skridoù er Grennamzer
- Anavezout istor ar skritur er Grennamzer
- Dizoleiñ labour ar venec'h eiler
- Skrivañ gant ur bluenn
- Dizoleiñ talvoudegezh arzel ar skritur hag an enliverezh (enluminure) er Grennamzer

Padelezh : 1^e30

AOZADUR

1) Gweladenn

Gweladenn ar skriturier (scriptorium) er mirdi evit dizoleiñ istor ar skritur, labour ur manac'h eiler (livoù pigmant, ar parchenn, ar c'heinañ...).

2) Atalier

Skrivañ gant ur bluenn waz ha dizeleiñ skritur krouet gant Karl Veur (« minuscule caroline »).

Gweadegoù

A-hed ar bloaz
Niver a skolidi uhelañ: 30



Levr Kells, Trinity College Library, Dublin, Ms 58 fol. 34 r.

5

Palioù pedagogel:

- Dizoleiñ ar weadeg e-barzh oberennoù azalek an Henamzer
- Sellet pizh ouzh gweadegoù e-barzh enlivadurezioù levr Kells ha levrioù all
- Tresañ gweadegoù

Padelezh : 1^e30

AOZADUR

1) Gweladenn

Petra eo ar weadeg ? Dizoloadenn gweadegoù Landevenneg ha broioù all.

2) Stal-tresañ

- Gweadegoù
- Skoulmoù (skoulm Salomon)
Triskell ha troellennoù all

An enklasker bihan

miz Ebrel- miz Du
Abadenn er-maez
Niver a skolidi uhelañ : 30



© B.Deroche



Palioù pedagogel :

- En em lec'hiañ
- Kompren al lec'hioù ha buhez an abati
- Diorren ar genskoazell hag ar genlabourat
- Evezhiañ, prederiañ, bezañ poellek

Padelezh : 1^e30/2^e

Preizhet eo bet ur bez en ur chanter tro dro d'an iliz e-pad an noz ! Kredapl e oar ur manac'h piv eo, met ne fell ket dezhañ freuzañ al laer. Kuzhet en deus arouezioù dindan stumm luziadelloù en abati.

AOZADUR

1) Displegadenn

Kinnig buhez ar manatioù er Grennamzer, istor bezioù an dud laik ha kefridi ar skolidi.

2) C'hoari

Roet e vo ur gartenn da bep strollad evit kavout al luziadelloù war al lec'h ha skarzhañ tamm ha tamm an dud diskred warno.

Ar saver abati

A-hed ar bloaz
Abadenn er maez
Niver a skolidi uhelañ 30



© B.Deroche

7

Palioù pedagogel :

- Kaout anaoudegezhioù diazez war ar savouriezh hag he geriaoueg
- En em lec'hiañ gant un tresad.
- Kompren emdroadur ur savadur a-dreuz ar c'hantvedoù.
- Kompren buhez ur gumuniezh vanac'h er Grennamzer (skolaj)
- Deskiñ kealioù istor an arzoù war emdroadur gizioù savouriezh (skolaj)

Padelezh : 1^e30

Landevenneg a zo un testeni prizius eus emdroadur gizioù savouriezh ar Grennamzer. Ar skolidi a labour e-barzh ur chanter gwir e lec'h ma vez gwelet an holl brantadoù adsavadurioù ar manati eus an IXvet kantved betek ar XVIIvet kantved.

AOZADUR

1) En em lec'hiañ en dismantròù

Gant skoazell ur vaketenn 3M, en em lec'hiañ war al lec'hienn henoniel, dizoleiñ lodennoù ar manati ha deskiñ penaos e veve al leaned.

2) Atalier

E-barzh dismantròù ar manati e vo dizoloet an ostilhoù hag ar mein implijet gant an artizaned. Desket e vo ivez doareoù muzuliañ ar Grennamzer.

E fin an abadenn, gwaregoù war hantergelc'h ha gwaregoù torr da adsevel; gizioù romanek ha gotek meneget dre skouerioù an abati.

Liorzh al louzeier

Mezheven- miz Gwengolo

Abadenn er-maez

Niver a skolidi uhelañ: 28

Eus ar re grenn betek ar re CM2


Gellout a ra ar stal-mañ bezañ cheñchet diouzh struzh al liorz.



© B.Deroche



© B.Deroche



Palioù pedagogel :

- Dizoleiñ labourioù al liorz er Grennamzer (magañ, louzaouiñ, gwalc'hiñ)
- Santout, selaou, touch, sellet pizh, anavezout, termenañ...
- Labourat e-unan ha gant ar re all
- En em lec'hiañ er spas gant skoazell un tresad
- Dizoleiñ endro ar vro er Grennamzer

Padelezh : 1^e30

Skolioù kentañ

AOZADUR

Skolioù-mamm (re grenn ha re vras)

a) Ar blantenn gollet

Kavout tro-dro d'an abati ur blantenn ouez gant skoazell ur skeudenn. Lec'hiañ ha diskrivañ anezhi el liorz.

b) C'hoari al louzaouer

Kavout plantennoù al liorz dre o stumm ha dre douch a-raok tresañ anezho.

c) C'hoari ar c'hweziou

Kavout ar blantenn frondus el liorz goude bezañ santet anezho e-barzh boestioù-dall
Pal an abadenn a zo dastum merkoù da zizoleiñ implij ar plantennoù er Grennamzer

a) War hent ar plantennoù er Grennamzer

Bodañ skeudennoù kuzhet el liorz evit dizoleiñ madoberoù roet d'ar plantennoù gant tud ar Grennamzer.

b) Livaoueg ar livourien

Goude bezañ kavet livioù ar plantennoù el liorz, livadenniñ o skeudennoù war livaoegoù.

c) Ar blantenn gollet

Kavout tro-dro d'an abati ur blantenn gouez gant skoazell ur skeudenn.

d) C'hoari ar c'hweziou

Implijout e eñvor ar c'hwezañ evit kavout plantennoù frondus. Gant eztennadoù plant e-barzh podoù ha spesadoù boued a zo el liorz

e) Kontadenn

Kontadenn istor plantenn al liorz er Grennamzer

Kêr Is

A-hed ar bloaz
Abadenn er maez
Niver a skolidi uhelañ : 30



Fuite de Gradlon, Evariste-Vital Luminais, 1884 • Mirdi arzoù kaer Kemper

Palioù pedagogel :

- Dizoleiñ ar glad dizanvezel, ar glad dre gomz dre ar vojenn Kêr Is.
- Dizoleiñ ur skouerenn treuzkas etre Buhez Sant Gwenole (IXvet kantved) ha mojenn kêr Is (XVIvet kantved)
- Skrivañ gant ur bluenn waz
- Kaout ur sell war grouidigezh arzel ar venec'h eiler hag enliverien ar Grennamzer

Padelezh : 1e30

AOZADUR

1) Kontadenn

Goude bezañ kontet mojenn Kêr Is e vo lakaet ar pouez war orin an istor ha temoù all :

- An darvoudoù (bez Gralon e Landevenneg, St Gwenole, henoniezh bae Douarnenez)
- An danvez danevelliñ (mojennoù kerioù beuzet all, romantoù marc'hregiezh)
- Ar mammenoù istorel (skridoù kentañ diwar-benn Gwenole ha Gralon, ar misterioù)

2) Displegadenn

Diskouez darempredoù etre hengounioù dre gomz hag hengounioù dre skrid ha skrivañ gant ur bluenn waz.

Padelezh: 45 mun./ 1^e30

Gweladenn al lec'hienn henoniel er-maez

Niver a skolidi uhelañ : 30



Gweladennoù heñchet

- Gweladenn heñchet al lec'hienn henoniel hag ar mirdi (1e30)

Gweladenn e div lodenn. Dizoloadenn istor ar manati hag ar vro (mirdi), dizoloadenn an dismantrou, ar roudoù henoniel (lec'hienn henoniel).

Hervez an amzer, live ar skolidi ha raktresoù pedagogel e c'heller labourat war an temoù da heul :

Ar vuhez vanac'h etre ar VIvet kantved hag ar XVIIvet kantved

- Manac'hiezh ha stern speredel ar gevredigezh
- Reolenn St Benead
- Ar vuhez pemdez er manatioù
- Roll sokial hag ekonomikel un abati

Istor an arz hag ar savouriezh

- *Scriptoria* en abatioù hag ekonomiezh al levr
- Aozadur-egor un abati beneadat
- Ar savouriezh hag an arz da vare ar Garolingidi
- Ar savouriezh hag an arz er mare roman

Mareoù ha temoù istorel

- Treuztiriadurioù ar Grennamzer uhel
- An adc'hanedigezh karolingat
- Oadvezh ar vikinged
- Ar mare roman
- Relijion ha kevredigezh er Renad kozh
- Arz ha glad eus an Dispac'h gall betek hiriv

Henoniezh hag Istor

- Termenañ, implijout ha keñveriañ ar mammenoù
- Stratigrafiezh
- Henoniezh arnodva

- Gweladenn heñchet an diskouezadeg verbad (45mun.)

Deuit e darempred ganeomp !

Ma z' oc' h dedennet gant un tem resis, ma fell deoc' h labourat war demoù all, deuit e darempred gant buhezourien an abati kozh hag e vo aozet an abadenn diouzh ho c' hoant.

Titouroù pleustrek

Surentez hag ambroug

Ar gweladennoù hag an abadennoù a vez savet hag heñchet gant buhezourien ar mirdi. Ar skolidi a vez dindan atebegzh ar gelennerien, ganto e vez heuliet ar gweladennoù hag an abadennoù. Dre m'az eo bresk al lec'h hag e tegemer gweladennerien all, eo ret deoc'h diwall outo, al lec'hioù ha labour ar skipailh kempenn. Lod eus ar plantennoù a zo pistrius, arabat touch anezho.

Atalieroù er-maez

Gallout a ra ar mirdi nullañ an abadennoù kaset en diavaez ma ra glav pe ma'z eo re zivalav an amzer.

Mareoù digor

A-hed ar bloaz e vez degemeret ar strolladoù, memes pa vez serret ar mirdi d'ar weladennerien hiniennel

Prizioù

Treziad 1

Hanter-devezh

Un abadenn evit pep klasad PE ur weladenn heñchet :

5,50 € /skoliad. (Mont e-barzh : 2,50 € + abadenn : 3 €).

Abadenn 1e30

Gweladenn heñchet 1e

Treziad 2

Hanter-devezh

Un abadenn evit pep klasad + ur weladenn heñchet :

6,50 € /skoliad (mont e-barzh : 2,50 € + abadenn + gweladenn heñchet : 4 €).

Abadenn 1e30

Gweladenn heñchet 1e

Padelezh hollek: etre 2e30 ha 3e hervez an abadenn.

Treziad 3

Devezh a-bezh

2 abadenn evit pep klasad + ur weladenn heñchet

Hervez an amzer :

7,50 € /skoliad (mont e-barzh : 2,50 € + 2 abadenn : 5 €).

An abadennoù a bad etre 3e ha 4e. M'ho peus dibabet an treziad-mañ e c'hellloc'h ober ur

weladenn heñchet eus al lec'hienn henoniell hag ar mirdi ouzhpenn (digoust, 30/45min.). Padelezh hollek : 4e/5e

Dont

O tont eus Brest: hent-tizh N165, hent-maez Ar Faou, mont war-zu Kraon-Morgat

O tont eus Kemper: Hent-tizh N165, hent-maez Kastellin, mont war-zu Kraon-Morgat.

Parklec'hioù

Kas ar skolidi war ar blasenn *Yann Landevenneg*, dirak ar porrastell. Parkañ ar c'harr-boutin war barklec'h an ti-kêr pe hini an abati nevez.

Mirout

Mirout dre bellgomz pe dre bostel div sizhun en araok d'an nebeutañ. Ur baperenn-virout a vo kaset deoc'h da vezañ degaset en-dro gant ur respont gadarnaat.

Pik-nik

Ur sal-debriñ a vez prestet deoc'h. Ret eo mirout anezhi dre ar baperenn respont.

Mont e darempred

Mirdi an abati kozh

29560 Landevenneg

Pllgz: 02.98.27.39.46

Pllskr: 02.98.27.35.91

Postel: g.fauve@museelandevennec.fr

Da notañ

Ar gwirioù mont e-barzh a vez paet gant Park an Arvorig evit an holl skolioù a zo er c'humunioù-ezel, + Brest, Kastell-Nevez ar Faou.

Treziadoù ispisial evito :

Treziad 1: 3€/skoliad

Treziad 2 : 4€/skoliad

Treziad 3 : 5€/skoliad